



CHANSON

POTRET PLOUILLAU

Var ton : ADIEU, PONTREO

M'am bije speret da gompren, evel a meus fantazi,
 Me a vije n'em implijet da zonet da gomposi
 Eur c'himiât leun eus a c'hlac'har, grêt da gonscrivet
 yaouanq,
 O deus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.
 Ebars er b'ia mil eis cant c'hoec'h, ar bemp a vis guen-
 golo,
 E zeo diguœt adare eus a baros Plouillau,

— 6 —

Tud yaouanq evit an arme, tud eus ar re derrupla ;
Glac'haret è o oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus qen nemet pévar :
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Meleda ,
Ha Yannic Prat eus ar Goajou ha Pipi an Aveant :

Pévar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud vaillant,
Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad :

Emâ a zo un devez trist hac a ra din calonad !
Guelet va mam baour o voela, ha va zad qèz desolet !
Va c'halonic ebars em c'hreiz zo dija qazi rannet.

Calz a sonchfe dê, marteze, penos e ven ur poltron,
Em be aon rac un ten fuzuil pe rac ur vouled canon,
P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an hentchou,
Pe gousqet var ur guele can ebars er c'hordegardou.

Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren
Bale bemde a guër da guër dre ar fanq hac ar vouillen ;
Ha goude e fin va beach rancout marteze campi,
Pe gousqet var an douar yen, pe otramant bivoaqi.

Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'haljent lenn em
c'halon

Evit guelet va bolonte ha va inclination ;
Ma na totfet nemet va goad, me en scuilfe tout joaûs
Evit souten hon Impalaër, un tad qer carantezus !

Piou ne gombatte qet hardi gant un Impalaër chris-
ten !

Ur gaus qer just hac e hini a zo facil da zouten,
Pa zomp memprou da Jesus-Christ, soudarded an Aviel
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel,
Arça eta, camaradet, qent quittat eus hor c'hontre,
Demp-ni da illis Plouillau da suplia hon Doue
D'or preservi demeus goal chanç pa vezimp en armeou
Ha da gonsoli bars er guër hon tadou hac hor mamou,
Adieu d'éch, Autrou Saint Millau, patron eus ar baros-
mâ ;

Adieu, qerent ha mignonet, cessit brémâ da vouela :
Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign ac'hanomp,
Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout e lec'h ma
zefomp.

Adieu, va mab, va esperanç, eme an tad desolet ;
Piou a gonsolo da dud paour goude ma vi partiet ?
Pa vin accablet gant cosni, me vo clêvet o laret :
Ma vije va mab qèz er guër, en dije va soulajet.

— 7 —

Clévit ar vam o qimiadi ive digant e buguel :
 Deut amâ c'hoas ma c'hambrassin ur vech qent eguet
 mervel ;
 Aben ma retorni d'ar guêr me vo êt eus ar bed-mâ
 Deus amân etre va divrec'h evit ar vech diveza.
 A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet d'ar
 billet.
 Bemnos vel ma fo din cousquet, me a seblant da velet
 O tont eus eur gombat sanglant, va eur chariot blesset ;
 Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet
 Ar soudard yaouanq contristet, c'hoas qent eguet partia
 Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur vouela :
 Tavit, va zad ha va mam baour, ha bevit en esperanç :
 Doue, tad a visericord, a so bras e Brovidanç.
 Goude ma vo fin d'ar brezel ha gondeet ar victoar,
 Gant graç Doue hac ar Verc'hes, e vezo fin d'ho clac'har
 Evit merq eus hor vaillantis gant lore deus hon tocou,
 Ni a zistroyo prest d'ar guêr evit sec'hi ho taelou.
 Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet,
 Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha qerent, ha mignonet ;
 Ha ma na memq qet ar boneur er bed-mâ d'en em velet,
 Graç decomp ebars er Barados assambles d'en em gavet.

FIN

Propriété